

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :
R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.
Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h. **R/ : Ha get ho spered !**

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pezit truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.
Setu Oan Doue, an Hini a lam pec'hed ar bed :

**R/ : Man Doue, ned on ket din ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion : Karet ho preuder, hag e vin geneoc'h.

- 1 Me eo ar bara daet ag an neñv.(2w) 4 Ma chom ma c'homzoù bev ennoc'h,(2w)
Neb a gred ennon 'deus ar vuhez. Goulennit get feiz, roet e vo deoc'h.
- 2 C'hwi holl a zo skuizh ha sammet,(2w) 5 'Vel m'en deus an Tad Ma c'haret, (2w)
Dait ha Me 'roay deoc'h nerzh ha kalon. 'Vel-se ivez am eus ho karet.
- 3 Dait, c'hwi a glask ar wirionez, (2w) 6 Me eo ar vuhez, ar wirionez, (2w)
Ma c'homzoù zo spered ha buhez. An Hent ho kaso betek an Tad.

Veit kloziñ an oberenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**
Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**
Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn : Intron santez Anna, diskouezit d'ho pugale,

Diskouezit 'vel d'o zadoù douser ha karantez,
Àr ho pobl lan a feiz daet amañ a vostad,
Strewit get largantez ho krasoù, ô Mamm vat.
Hon tud kozh en hor raok, a zeuae setu gwerso,
D'hoc'h enoriñ amañ avel Rouanez ar vro,
Gouarn a ra ho chapel etre he mangoarioù,
Fronde bev o c'harantez, frond c'hwec o fedennoù.



Bep sul ketañ ar miz : overenn da 10e30 e chapel ar Werc'hez.

**Pardon santez Anna : overenn da 9e er Penniliz,
d'ar sadorn 26 a viz gourhelen.**

Parrez Ker Anna

14^e Sul ordinal blead K

6 a viz Gourhelen 2025

Kan digor : O Rouanez karet an Arvor,

**O Mamm leun a druez
Àr an douar, àr ar mor,
Gouarnit ho pugale.**

2 Ho kalon zo digor
'vit holl ar Vretoned ;
an dud ag an Arvor
Ho kar ivez berped.

1 Intron santez Anna,
Ni ho ped a galon :
Get joe ni 'n em laka
Dindan ho kouarnasion.

3 Patronez Breizh-izel,
Doc'hoc'h en deus rekour
Ho Arvoriz fidel,
Roit dezhe ho sekour.

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie (Ordinal hervez ton gwerz Pontkalleg)

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.
Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec emañ ho lec'h bemdez.'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.
Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr Izaia

En em rejouisit get Jeruzalem ha bezit laouen a-gaoz dezhi, c'hwi holl he c'har; bezit leun a joa a-gaoz dezhi, c'hwi holl ho peus douget begin dezhi. C'hwi a vo maget geti betek bout ho kwalc'h doc'h he c'halon, mammenn a gonfortañs, ha plijadur ho po é torriñ ho sec'hed get he gloar hep somm. Rak 'vel mañ e komz an Aotrou : Setu e yan da gas dezhi ar peoc'h 'vel ur stêr vras, ha pinvidigezh ar broadoù 'vel ur froud-dour dic'hlannet. Ha chwi a vo 'vel ar vugaligoù douget àr vrec'h o mamm ha flouret geti àr he barlenn; 'vel ur c'hrouadur koñsolet get e vamm, me ho koñsolo, ha koñsolet e vehet e Jeruzalem. C'hwi a welo kement-se hag ho kalon a vo laouenaet, en hoc'h eskern e savo buhez nevez 'vel ar geot fresk, hag an Aotrou Doue a ziskouezo nerzh e zorn d'e serviterion.

Setu komz an Aotrou Doue : Bennozh da Zoue !

Psalm 65 : Youc'hit da Zoue, douar a-bezh !

*Youc'hit da Zoue, tud an douar a-bezh,
kanit da c'hloar e anv,
rentit dezhañ splannder ar melasion.*

Lârit da Zoue : «Pegen estlammus hoc'h oberoù !

*Dirazoc'h e stou an douar a-bezh, d'hoc'h adoriñ,
ra ganint ac'hanoc'h, ra ganint hoc'h anv.»*

Dait ha sellit doc'h oberoù Doue :

Graet en deus burzhudoù e-keñver maboù an dud.

*Kemmet en deus ar mor e douar kalet,
treuzet hon eus ar wazh hep glebiñ hon treid;
lakaomp enta hol levenez ennañ.*

Ren a ra àr bep tra en e c'halloud peurbad.

*Dait ha selaouit, hag e kontin deoc'h holl hag a zouj Doue,
an holl gement en deus graet evit ma ene.*

*Melasion da Zoue, rak n'en deus ket argaset ma fedenn,
n'en deus ket nac'het e vadelezh doc'hon.*

Cil lennadenn : *Lennadenn tennet a lizher S. Paol d'ar C'halated*

*Mam Breuder, evidon-me, Doue da viret e klaskahen tenniñ gloar ag un dra bennak, nemet a Groaz hon Aotrou Jezuz-Krist e vehe, rak drezañ ar bed a zo bet staget doc'h ar Groaz evidomp, ha me evit ar bed. Rak an amdroc'h n'eo netra, nag an diamdroc'h; ar pezh a gont eo bout ur c'hrouadur nevez. Ha da gement hini a heulio ar reolenn-se, peoc'h ha trugarez, hag ivez da Israel Doue. Bremañ erbat da zen ober diaezamantoù din ken, rak a-walc'h eo din dougen em c'horf merchoù Jezuz. Breuder, gras hon Aotrou Jezuz Krist da vout get ho spered. Amen. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Allelouia :

*Peoc'h ar C'hrist da reno en ho kalonoù :
Ha ra vezo komz ar C'hrist é chom en ho mesk en he leunder.*

Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.***

Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Lukaz.*

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Abiel : *En amzer-hont, an Aotrou a zibabas daouzek ha tri-ugent ag e zisiplad, ha eñ o c'hasas en e raok daou ha daou da gement kêr ha lec'h ma oa dleet dezhañ monet eñ-mem, hag e lâras dezhe : «Bout eh eus paot a vlezad, met bihan a labourizion. Pedit enta mestr ar blezad da gas tud d'er mediñ. Kerzhit ! Setu ma ho kasan evel oaned e-mesk ur vandenn bleidi. Na gasit geneoc'h na yalc'h, na sac'h, na botoù; na saludit den ebet àr an hent. E kement ti ma yahet, lârit da gentañ : «Peoc'h d'an ti-mañ !» Ha mar bez eno un den a beoc'h, ho peoc'h a ziskenno àrnañ; mar ne vez ket e tistroay deoc'h en-dro. Chomit en hevelep ti; debrit hag evit ar pezh a vo; rak an hini a labour a c'hounit e voued. Ne vehet ket*

é vonet a di da di. E kement kêr ma yahet, mar bez graet degemer mat deoc'h, debrit ar pezh a vo kenniget deoc'h; gwellañ d'ar re klañv a vo er gêr-se, ha lârit d'an dud : «Tost doc'h emañ rouantelezh an Aotrou Doue.»

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e teuay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an ne hag an douar !

Leun eo get ho kloar an neñv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù :

Gloar Deoc'h-C'hwi marv àr ar groaz ! Gloar deoc'h-C'hwi, Jezuz !

Adsavet leun a vuhez, hon Salver !

Hag hon Doue, C'hwi zay en-dro, Splannder lugernus !

Setu-ni àr-sav doc'h ho kortoz !

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv. Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'het doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion Met hon diwallit doc'h an droug.